

# CHANSON NEVEZ, 429

*Composet var sujet ur c'himiad etre daou zen  
yaouanq a Escopti Treguer.*

Var un ton divertissant.

---

*Ar Goas.*

**B**ONJOUR d'èc'h, va Mestrez, deut oun c'hoas  
d'ho quelet;

Dioc'h ma leverot din, em rentot glac'haret:  
C'houi oar a bell-amzer peguement ho caràn;  
Merqet emeus-én d'èc'h n'en d'è qet a vremen.

Demeusurc'hostezalloc'heussurvazromplet,  
Ma na deut oc'h-unan un nebeut d'am c'haret;  
Seblantout a rê din ne oac'h qet drouc-contant  
M'en em gavemp un tu assambles o parlant.

Bet zo ganeomp hon daou alies preposiou,  
Testes vad oc'h anê, dalc'hit mad d'ho comzou;  
Me vo fidel d'am guer, dalc'hit mad d'oc'h hini,  
An amzer a avanç, poent è deomp dimezi.

Ho pizach, ho portret, ho teod, ho taoulagad,  
Ho furnez, ho touçder, ho comzou dereat,  
O deus grêt em speret qer bras impression,  
Mar deut d'am dilezel, e ranno va c'halon.

N'ouffet petra d'ober, ret eo clêvet bremâ  
 An arrêt definitif, va setanç diveza ;  
 Guell eo mervel buan eguet bout languissant,  
 Bepret en esperanç, bepret en nec'hamant.

Roit din, va Mestres, prontamant va arret,  
 Ha sonjit gent e rêi emeus calz ho caret ;  
 Consultit ho calon, sonjit n'en deus hini  
 Ho car mui eguedon, ha deut d'am c'honsoli.

*Ar Plac'h.*

Donet d'ho consoli a c'houlet, va mignon,  
 Ezom a meus ivez a gonsolation :  
 Ganéc'h e c'houlennàn ar c'hraç a c'houlennet,  
 Ezom hon eus hon daou da veza consolet.

Ho setanç a c'houlennit, plijet gant va Jesus  
 E tepante ouzin e rêi deoc'h gracios !  
 Certen en o pije en ho tiscretion,  
 Agreabl deomp hon daou en dezir hor c'halon.

Ma vijen me mestres demeus va bolonte,  
 Me voa deoc'h ha c'houi din hep nep difficulte :  
 M'emeus ho caret mat hac ho car a vremâ,  
 Ranna ra va c'halon oc'h er em dispartia.

Mes gent dispartia, me ho ped, selaouet,  
 Ha grit reflexion var va guer ur momet :  
 Doue a c'houre'hemen senti oc'h tad ha mam,  
 Hac oboissa dê evit beza divlam.

Int azalc'h n'hor henver plaç an Autrou-Doue,  
 Oboissomp, p'on eus digante ar vue :

Calz a boan o deus bet o tont d'hon elevi,  
 Ne qet just hep o graç-vad donet da zemezi.

O mouez zo evidomp certain mouez un Doue,  
 Bigen netra ne ran hep cavet o c'honge :  
 Grêt emeus' va fossubl evit o renta contant,  
 Grêt oc'h eus hoc'h ini, ha ne dint qet assant.

Me gred bremâ certain ne domp qet destinet  
 Da veza prijou assambles unisset ;  
 Doue râ deomp entent e vouez dre o guenou,  
 Bigen ne dransgressàn sure c'hourc'hemennou.

Ma raen hep oc'h raç-vad ur marc'hat qerpadus,  
 Em bez aou goude-se na ven me maleurus ;  
 Va c'houstianç goude a rebeche din-me  
 Em be ho qemeret hep conge va ligne.

Comzet meus ha grêt comz en hor faveur oute,  
 Ha biscoas neus gallet o zrei var an tu-ze ;  
 Credit en assuranc onn-me qer bras fachtet  
 Ha ma oullac'h beza, pa ne dint distroet.

Qement ameus grêt tout a zo bet inutil,  
 Demezi hep o c'honge n'en deo qet difficil ;  
 Mes ennes zo un dra ha na rin birviquen,  
 Var guementse james ne dorrin o lezen.

*Ar Goas.*

He bien, va mestres, houmâ zo calonad,  
 A goust un abondanç daelou d'am daoulagad !  
 Va c'halon gant glac'har a zo cazi rannet :  
 Houmâ zo calonad, goude beza caret !

*Ar Plac'h.*

Allas ! va servicher , penos ho consoli ?  
 Qer bras eo va regret ha ma zeo hoc'h hini ,  
 Qement en ho carrien ha m'aljac'h va c'haret ,  
 Ar regret a zo just entrezomp partaget.

*Ar Goas.*

Coulz eota, vamestres, prontamant qimyadi,  
 Pa neus qet a voyen evit hor c'honsoli ;  
 Credet am boa bepret an amzer a deuje  
 Da zistrei ho qerent da veza em c'hoste.

Gounezet em boa-y ha distroet a gren,  
 Mes prestiq goude-se e chenchont a lezen ;  
 Ne fizin qet enno, aoüalc'h oc'h eus clêvet  
 Divar va fenn bemdez pa deuen d'ho quelet.

Poente deoc'h caout peoc'h, hadin-me dimezi,  
 Aben eiz dez amâ me vo sur anezi :  
 Qeuz ameus o quittat ; c'houi vije, ma carjac'h,  
 Nemet var ho refus birviquen n'am bo plac'h.

Adieu deoc'h a laràn , adieu va esperanç ;  
 Bremâ me ranço clasq en ur plaç all va chanç,  
 Fachel e zoun terrubl o tonet d'ho quitat ;  
 N'en deus netra d'ober vit gounit ho craç-vat.

Roit din qent quittat ur poq da guimyada ;  
 Allas ! me gred certen e vo an diveza :  
 Calet ê deomp hon daou ur seurt cris disparti,  
 Mancout ra va c'halon , an nerz em izili.

Ret eo e nep fortun caout calz eus a gourach ;  
 Arabat eo succombi biqen evel ul lach :  
 Finisomp gant enor vel hon eus commancet,  
 Pa na bermet Doue e vemp-ni unisset.

Adieu dêc'h a laràn qent eguet ho quittât,  
 Me c'houlén evidoc'h tri pe bêvar mennat :  
 Da guenta caout un all en devo talanchou  
 Mui eguet n'ameus-me, ha mui eus a vadou.

Buez hir, joa, eurustet, ha calz demeus a chanç,  
 Yec'het, plijadurez, famill en abondanç,  
 Graç Doue er bed-mâ da zont d'ho qenderc'hel,  
 Er bed-all ar goude d'ar joayou eternel.

E zàn bremâ d'ar guêr, adieu a laràn deoc'h,  
 Birviqen n'ho quelin n'am bezo joa ouzoc'h ;  
 Mar permet va c'hlac'har arrêti va daelou,  
 Aben eiz dez amàn eur plac'h all am bezo.

Pa ne allàn caouet an hini ameus c'hoant,  
 Sur un all am bezo hac a vezo contant ;  
 Un nor a ser ouzîn hac un all a zigor :  
 Ret eo goude refus repara an henor.

*Ar Plac'h.*

Allas ! va servicher, m'ho ped, na gredit qet  
 E ven-me qiriec mar doc'h bet refuset ;  
 M'am bije-me gallet, hep terri al lezen,  
 Donet doc'h eureuji, certen en er gragen.

Qement oun glac'haret ma ouffac'h-u bezè,  
 Emedi va c'halon var ar poent da ranna ;

Bras eo ar sacrifice a ràn-me da Zoue,  
Me gred e recevin ar recompanç goude.

Me garje n'am bije birviçen ho quelet,  
Pa ne allàn bremâ ho possedi bepret;  
Dre va oboissanç qer aoüalc'h e paeàn  
Va education, va antre er bed-màn.

N'ouffet Petra raet, al lezen a gomand,  
Ne avancin james hep o c'honsantamant:  
Brizomp bremâ souden oll nerz hor chadennou,  
Ha renonçomp agrenn d'hon oll promessaou.

En emseparomp pront, pa n'ellomp gouscoude,  
Na chomomp qet an eil d'afflija eguile;  
Elec'h all ni gavo eur re d'hor c'honsoli,  
Rac amàn hor glac'har ne ra nemet cresqi.

Qent ma tispartiimp, m'ho ped, va servicher,  
Un daou pe dri souhet ameus c'hoant da ober:  
Urfortungaer haprompt, furnez, madou coantis,  
Vertuz, speret, menach, famill ha yaouanqis.

Grac Doue er bed-mâ da zont d'o qenderc'hel,  
Hac er bed-all goude ar joayou eternal:  
Cetu aze ar poçou ho poa goulennet,  
Biscoas hini na rois gant muic'h a regret.

Ma carre an dud yaouanq pere a rën er bed,  
Cundui o yaouanqis gant enor ha respet,  
E vevfent oll ervad e durant o bue,  
O caout an esperanç demeus a c'hloar Doue.

---

## CHANSON AR BIG.

*Var un ton ancien.*

**D**EMEZELET an autrou Tanguy  
 D'Û devoa diou Big en o zi ;  
 Disqet o devoa d'è parlant ,  
 Evit o divertissamant ;  
 Da vourg Plouyan e c'hent da bourmen ,  
 Da velet o amezeyen ,

Ar big qenta eus aneze  
 A ye eus an eil ti d'eguile ,  
 Elec'h ma sante c'hoes ar c'hrampoez ;  
 Hac e c'houlenne un tamic  
 Da sôulaji e c'halonic.

Allas ! dre valeur e zeo bet êt  
 Da di Janned an Avelet ,  
 Evit goulen un tam crampoez ,  
 Hac ivez ur bannac'hic læz ;  
 Mes an tyrantes-se cruel  
 El lazas gant un tol spanel.

Monstr ! da galon na fraille qet  
 Gant an druez eus e c'hlêvet

O crial divar boes e fenn :  
 Va buez din , Aveleden ;  
 M'ar doud fachet , ne deuin mui  
 Da glasq crampoez na yot da ti.

An dyrantes ne get bet contantet  
 O veza bet ar Big lazet ;  
 Qemennet e deus da vap Grall  
 E rencje ober qement all ,  
 E rencje ober evelti  
 Da big all an Autrou Tanguy.

Yan an Ena , ni a sonje  
 E voas-te fur bete neuze ;  
 Pa poa-de grêt ur belevat ,  
 E poa qeillet ar scudel goat ,  
 A poa-de qeillet en ti-forn :  
 Chanç vad hon eus divar da zorn.

FIN.

